


EUR CHATOLIK

HAC AN DEN DIFÉ



I.

Eun den oa disket braz, eun dé a c'houlenné,
Digant eur c'hatolik « Guelet oc'h c'heuz Doué ? »
A dra sur, mé héman, pa droan ma sellu,
Na vélan némethan, hag he vad-obéro.

II.

Doué oll c'halloudek en devez hon c'hrouet
Evidomp en deuz gret kément so var ar bed,
Ma paousfe d'ho harpa, e koéfent da nitra,
Evel korfo maro é deufent da vreina.

III.

Pel braz arok-omp-ni é oa krouet ar bed
Dirag hon daoulagad, bemdé vé adkrouet,
Al labourer a had, Doué ra da greski,
Ha hervez he labour, hen ro da bephini.

IV.

Lest an doktoret fall, komz dimeuz an natur,
Doué éo ar vomén, a bep tra, bezit sur,
Hebzhán, kément a so, a deufé da fonta,
Evel eur voulik erc'h, pa zeu hé hi da domma.

V.

Evelsé-Boul ar bed, a fresfé a dammo
Pelec'h kaout artisan da lakad d'hei klec'hrio ?
Gant ho oll finésé, birviken, tud difé
Na réfet eur ieoten, heb kaout sikour Doué.

VI.

Da denna he alan, piou a laka peb den,
Piou he dalc'h en he sa, soun hag uhel he ben ?
Piou ra déan kousket, ével pa vé maro,
Balé néur huvréal, hag heb ma tihuno.

VII.

Piou ra d'ar bugelik, kreskin a dammigo?
Piou ro dézan skiant, nerz en he c'hoazio,
Piou ra dézan koza, ha dinerza goudé,
Goal verr eo ho spéret, mar n'ansavet Doué.

VIII.

Piou a lak ar Génét, ar feson, ar furnez,
En eur plac'hik honnest, ma véler eo guerc'hez,
Piou ra d'an den iaouank kerset var an hent mad!
Heuil gourc'hemen Doué, alio mam ha tad?

IX.

Ré all, er memez noad, aliez vé guélet,
O tiskoel ar viso var ho bisaj skrivet,
Abred ho disurjo a gaz anhe d'ho bé,
Ha na van var ho lerc'h met ar c'houez fall anhe.

X.

Var visaj an den koz a vé merket ivé
Pe zéo den a feson, pe zéo den didoué.
Ar merk-sé a lavar mar-d-éo bet den honnestr
Pe den diroll henvel ouz eul loén digobestr.

XI.

Mar goul béan plantet, en douar evel ki,
Laret, eo eur varc'h-kagn, stoufet buan ho fri,
Arok ma vo maro, pellait diouthan,
Vel diouz eun aër-wiber, pe diouz eur c'hi klan.

XII.

Évit mougá ar prenv a gring he gonsianz,
Heb soursi diouz nitra, német diouz he vévanz,
An den difé lavar neuz Ifern na Doué,
Varben ar fin a vé goall néc'het kouskoudé.

XIII.

Doué a zo ré vraz, évit béan nac'het,
Pa so eur Baradoz, eun Ifern a so red,
Anez, oll-challoudek, Doué na véné ket,
Ma véné an dud vad touez an dud a bec'het.

XIV.

Deuz éta, den difé, sell ouz bolz an Envo
Ouz an héol, ar stéret, al loar hag an astro,
Mar na vélez éno dorn gallouduz Doué
Ké, hardi da Dinam, m'as po eur zaé névé.

XV.

Heol binniget, skéduz é zéo ta sklérijen !
Daoust pegen kaer, é zoud, teuz kouskoude perc'hen,
Panaved dorn Doué e oa trist ta sello,
Ha diez a véfé lakad did lunédo.

XVI.

Den difé, lavar din, piou ren an amserio ?
Henez so he gompas ken just hag rodjo,
Daoust pegen braz pel zo, éma terc'hel he di,
Kamed he venvio na gaz da zireni.

XVII.

Gant he vrec'h gallouduz beptra so dioallet,
Gant he binvidigez bep krouadur maget,
Var ar bleunio, er prad, var an evn er c'hoago,
Hen a daol he lagad divar lein an Envo.

XVIII.

Tosta c'hoaz, den difé, sell an evnédigo,
Sell spiz ouz ho labour, pa réont ho néijo.
Deuz, goulén diganthé, piou en deuz ho disket,
Piou eo an Ijinner hag en deuz ho stumet !

XIX.

Vit ober é peb lec'h, memez tra ho neijo,
Breman, vel guez'hal goz, vel ma ré ho zado,
N'en deuz nemet Doué, d'ho c'hélen ken brao all
Dall pik eo ta lagad, mar n'he guelez raktall.

XX

Piou a ra d'ar c'hok ru, kreiz an noz, da ziuuheur
En anv, kouls vel er goan, kana d'ar memez heur
Vit diskoel d'ar c'hristen, pa sav deuz ar beuré
Dé mont var he zaoulin, da c'houl benoz Doué ? —

XXI

Piou a ra d'an dour scler, rédeg dré an douar
Var véné, en draouien, ha béték var arbar ?
Piou hen sklabei dré oll, é peb bilajennik
E peb kear ar vrasa, vel é peb tachennik ?

XXII

Pa sellan ouz ar mor, o lampat en drézen,
Chom a sa, mik, el lec'h merket gant he berc'hen
Non ket evit sonjal a so tud ken difé,
Ken sot gant ho skiant, ma nac'hont ho Doué.

XXIII

Henvel int diouz an dud, a serr ho daoulagad,
Ouz an heol, é kreizté, hag a lar eo noz mad,
Dré meo du ho ine, o ruillal er péc'het,
Nint ket evit kredi so tud fur var ar bed.

XXIV

Souézet bras à vent, vélet ar paour euruz
Ha joauz gant neubet, à drugaré Jésus,
Hi gant ho oll mado so dalc'hmad trubuillet :
N'en deuz ket ar guir beuc'h, vit an dud a béchet.

XXV

Ar paour a gar Jésus, so laouen ho séder,
Ar pinvik dizoué so karget a viser,
Kaer n'euz klask plijadur, éneb lézen Doué,
Birviken n'hé c'havo, nag en noz nag en dé.

XXVI

Ni oll guir vretonet, bézomp tud a guir fé,
Lakomp hon fizianz é madelez Doué,
Ha mar deu en hon zouez denved galouzénet,
Pellaomp diouthe, gant aon rak ho chlenvet

XXVII

Da Zoué dlé béan, dreist oll, hon c'halono
Pa zéo d'al labourer, an ed deuz he barko
Doué lez peb unan, frank en hé liberté,
Gobr peb unan a vo hervez mad he vué.

Y. HERNOT.